



# BUEZ



## SANTEZ GENOVEFA A VRABANT

Var eun ton ordinal

Me o suppli compagnunes,  
Da glevet cana eur vuez,  
Da Genovefa a zeo gred,  
Melezour d'an itronezet.

A Vrabant e oa guinidié,  
A lignez nobl ha pividie,  
Christenez mad e voa ive,  
Guir servicherez da Zoue.

Pa voa en he bugaleach ;  
Hi a gare an han hermitach ;  
En eur c'horn a jardin e zad,  
Ne met eno n'em gav er vad.

He mamm ouz e chonsideri  
Eun deiz ac'houennas outi :  
Penos, va merc'hic hermites ?  
Hà na deuet-hu quet d'ar palez.

Va mamm e cornic ho jardin  
Me a meus eur boquet divin ;  
M'em meuz eno eur melezour  
An autrou Sant-Yan-Badezour.

Allas ! va merc'hic emezi,  
C'houi n'en noc'h ket evit souffri  
Ebars en dezert e zeus poan  
Ne andurfec'h quet a gredan.

Kærch egued fourdilizén  
E voa ar plac'h-mà a dra certen,  
Quen a deuet da vit e foltret  
Da gass d'an noblanç da velet.

Eur palatin, Siffroi hanvet,  
He renomme e deus clévet,  
Hac a zisquennas en Braban  
Gant eun equipach excellant.

Ractal vel ma oa erruet  
En ty e zad he n'em rentet  
En em brezantas er pales  
Saludi ar Prinç hac ar Brinces.

Goude o beza saludet,  
E menad n'eus goulenet,  
M'en vije ar Brinces yaouanq  
Qu'en eguet monet da Vrabant.

He zad dont da gonsideri  
E voa avantajus ar parti  
A roas karg d'e mamm neuze  
Da c'hout a hi a zimeje.

Va merc'h prest en em preparet  
Eru zo eur Prinç d'ho quelet :  
Eur palatin a voad huel,  
Quendea gompez d'an Impalaér.

Me nemeus nemet seitec vloaz,  
Ha dre ze hon re yaouanq c'hoas  
Ne non c'hoas nemet eur buguel  
Da vont da suit an Impalaér.

Evel an eol pe ar c'hrystal  
E c'hantras ebars ar zal,  
Ar palatin zo estonet,  
O consideri e guenet.

Gant henor a perseveranc,  
Ec'h eus dezan ar reveranç,  
He furnez hac e modesti  
A boe meurbet d'he fantasi.

Mæs pa voa parlantet dezi  
Var ar sujet da dimezi  
E chanchas a liou e bizach,  
Ar palatin e remerquas.

Ne ouffe den consideri  
Peguement a velancoli  
A gonserve ar palatin  
Gant aoun kaout refus diouti.

Eur mis anter eo padet  
Solenniteo an eured,  
A sonnerien, ar bal, an danç,  
Visitou hemde gant noblanç.

Siffroi e hui oc'h eus eurejet  
Ar gaëran demeus ar merc'het  
Evit monet ganec'h d'ho ty,  
Diouallit ne debe annui.

Birviquen ennu ne devo  
Evit queit a ma vezi beo,  
Ne quet evit cavet annui  
E chouennan da zont d'am zy.

Siffroi o vezó preparet  
Da vont da Treves gant e bried  
A voa gant e dad recevet  
Gant cals a joa hag a respect.

Daou vlavez anter e zint bet  
Hep bean gant netra tourmantet  
Bras e voa ar fidelite  
A tra entre a daou bried-se.

Quen a deuas Abderam,  
ENN adversaour bras da roue,  
Da brometi a dra certen  
Massacri an oll gristenien.

Eiscoas distruch ar zourdadet  
Evit eur vech na ve goelet  
A dal Sodom a Betsabe  
Betez Tour e bad e arme.

Tri-uguen mil zoudardet,  
Ha daouzez mil a zragonnet,  
A voa gant Martel dirac Tour  
Ha c'hoas e chouennen zicour.

Scriffa e eure d'ann noblanç  
E Allemagn, a Spagn, a Franc  
Dont assistan Charle Martel,  
A voe general er brczel.

Siffroi, unan a re vrassan,  
A varche ive da gentan,  
Hac e voa dean discrifet  
Monet gant ann Allemagnet.

Siffroi a lizer pa welas,  
Genovefa o confias  
E dieguez, e oll vadou  
De gonsidant hanvet Golo.

Neuze pa voa prest e arme  
E bartias en hano Doue  
Hac e vea gant Martel recevet  
Gant cals a joa hac a respect

A drugarez an Eternel  
A deu a victoir gant Martel  
Abderam zo bet lazet  
En Tour hag en oll zoudardet

Pa voa achu ar gombat-ma  
Da velet e Genovefa  
En deuz digasset Siffroi  
E zimenti hanvet Lansfroi

Itron setu aman kélou  
Lizerou, digant an aotrou ;  
Er paquet e zeus eur presant  
A dal eur som bras a arc'hant

Lavraret a ra d'an itron  
Ez ann autraou da Avignon  
Ha da Narbon evit quemer  
Roue bras a Sarasinet

Evel ma clevas quemen-se  
E ze c'hoas d'an arme  
E scifas buan dre Lanfroi  
Eur lizer goel drist da Siffroi

C'houi Siffroi a zo en arme  
En danjer braz eus ho pue  
Mes ho Genovefa a zo  
En quen bras danger gant Golo

Pedevert ne meuze quet c'hoant  
Prononci comzo insolant  
Me lavarfe ar propositiono  
A gleo an itron gant Golo.

Golo a voa eun intendant  
A voa bembe communament  
En compagnunez an itron.  
En despet d'he opinion.

Toll evez papillon bian  
Hac na vez losquet gant an tan  
An tau euz an impurete  
A zo nez kalon nos a de

Na sonjefes en devotion  
Hag en modesti an itron  
Ne laques da speret  
Da garant nep a skaro quet.

Pa vel ervat ar mechant ma  
N'el quet deceo ar Brinces man  
Ar soupçou en deveus sonjet  
Laquet e calon e fried

Ama eo guelet an impi  
O command c'hoari e dragedi  
Ember velfet c'christenien,  
E oll dreitourach pen-da ben.

Eur c'heguiner a voa en ty  
A bel a voa o zervichi,  
A voa karet gant an itron  
Abalamour m'oa d'en guirion,

Rei a eure an intendant,  
Dar c'heguiner commandamant  
Montd'hech'amb pa vije couques  
Hac e laquat o c'hemeret,

Caér o doa an daou innocent-se  
Quement an doar hac an èv  
Da zonet eno da destou  
Euz ann dreizourezou Golo

Allas ! Allas ous ar gibet  
Mervel paour quez, e vezo red  
Ni a rai pinijen hon daou  
Eus an dreizourezou Golo

Quemeret voa ar c'heguiner  
Hac en laquat prisonnier  
Genovefa a vo laquet  
Ebars en eur gambr alc'hueet

Eno e gombate oute  
Abalamour de chastete,  
Scrifia ra Golo liser  
Ha cass messenger d'an autre

A lavaret avoa decevet  
Gant ar c'heguiner he bried  
Scrifia eure an autre  
Da laquat Drogan d'ar maro

Laquat Genovefa ive  
Er prison quen ma eruje.  
Pa ve bet pemb mis er prison  
Neuze vouilloudas an itron

Hep sicour na golou, na tan  
Hi a chanchas e mab bian  
Incotinant ma voa ganet.  
E gristeui e deveus grct

Gant aoun na varge diganti ;  
Hac en he hanvas BENONI.  
Sevel a re Golo ar vrud  
Communament e toues an dud.

Penos Siffroi a vo beuset,  
O sonjal cavet e bried  
Cassa a eurè e vaguerez  
Da c'houlen digant ar Brinces

Ma carje dont d'he eureji  
E roje liberte dezi  
Ar zantez a voe quelennet  
Gant ar rouanez deus ar bed ;

Ebars er gampr pa entreas  
Eur façad dezau a roas  
Ennes ao tol al lealdet  
A boa da Siffroi prometet!

Ma vijes fidel emezi  
Pa voas laquet da vestr en ty  
Te a vije recompensem,  
Pa vije eru va fried

Arriout a ra lizerou  
E tistro d'ar guer an autre  
Pa gleo Golo e teu ar c'hont  
E za da Strasbourg d'berencontr.

Mont a ra da dy ar sorcerez  
Hac a voa c'hoar d'ar vaguerez  
Hac req dezi aour hag arc'hant  
Quement a ma vije content.

Me meus eur melezour ardant  
Eme ar sorcerez mechant,  
Hac rei da Siffroi guelet  
Ar pez n'em deo c'hoarvezet

Pa voa zur démeus he affer  
E zas joaus ebars en kaër  
Ma voa gant ar c'hont recevet  
Gant cals o joa hac a respect,

Neuze e tennas a gostez  
Da c'hout outan a vironez  
Var ar sujet eus e bried,  
A rent e galon constristet

Golo a lavaraz dean  
Ne doueti quen emezan  
Demeus e infidelite,  
A zo drejudi d'ho bue

Ouspen e me an den mechant  
Me aneve eur vreg vaillant  
A ziskollo en ho presans  
Quemen zo gret en hoc'h absans

Siffroi neuze ous e glevet  
A so contantet e speret  
Evel darn deus ar gristenien  
O tot da gredin sorcerien.

Monet a reont assambles  
O daou da dy ar sorcerez  
E eun toul dindan an douar  
Elec'h na oa na eol na loar,

A sorcerez a allumas  
Diou c'holoen gaëra a goar glaz  
Leiz eur bezel demeus a zour  
Laquat dindan eur melezour,

A ra dezau teir guech guelet  
Ar c'heguiner gant e bried.  
Neuze ec'h ordren da Golo  
Da vont d'he laquat d'ar maro

Hi hae he mab Benoni,  
Ro de ar maro a guiri.  
Golo sur demeuz e affe  
A sistroas jouaus d'ra gaér

A lavaras d'he vaguerez;  
Gret ar vec'h-ma eus ar Brinces  
Roet c setanç gant e fried,  
Evid ma vije distrujet:

Hi ba e mabic Benoni.  
A varvo sur em fantazi.  
Eur plac'h yaouanc a voa en ty,  
Eur vec'h-dezi ho zervichi

Touchet euz a gompassion  
A ias da gavet an itron.  
Allas ! emezi ma mestres :  
Gret ar vec'h ma eus ho puez?

Deut ar setans gant Golo.  
Evit bo laquat d'ar maro,  
Lavarit din ma mignonez  
Petra vo gred d'am buguel quez?

Allas ! ma mestres emezi,  
Mervel rai quercouls a c'hoi  
Va mignonez, ma am c'heret  
Grit eur blijadur em requet

Digasset din liou a paper,  
Evit ma scrivin eur billet,  
Evit ma scrivin eur lizer.  
Da laret adieu d'am bried !

Pa vez Golo o coannia  
C'hu clo monet da vita,  
Hac en deuler em c'habinet  
Eur c'houls bennac e vo cavet.

Adieu, emezi, ma bried,  
Me ia d'ar maro en ho reqet:  
Biscoas nemeus gret resistans  
Da souffri d'och obeissans.

Rei a eure an intendant  
Da zaou vevel commandamant  
En eur c'hoat donet d'ho laza,  
Ha sigas ho zeod deza

Sevel a eure quent an de  
Ha cass gante an daou den-ze.  
Pa voent erruet er prison,  
E voa divisquet an itron.

E ront dezi var e zro  
Eur goz ventellic d'e golo  
Pa yoant erru ebars er plas  
Unan a den eur gontel noas

Evit laza e Benoni  
Voa entre e diouvrec'h ganti  
Ne doa lavaret guir a bet:  
Neuze e gommansas prezeg

E za d'an daoulin diraze  
D'o supplia en hano Doue  
He laza quet he buguel  
Né renqje quetdiou vech mervel.

An daou servicher gant truez  
A lezas gaute o buez  
Ha gonde ho zrugarekat  
Ec'h antreas don eur c'hoat

En eur rivier pa dremenais  
Diamant Siffroy he daulas  
Da redec gant an dour roulant  
Pa voa kaus demeus e sourmant

Evit emezi n'am bo quet  
En beq fesson poan o velet  
Ar merq se eus hon union  
Epad or separation.

An diou noz quenta e zeo bet  
Dindan eur derven ho couisque  
Hep souffri na poan nac ennu  
Nemet damant d'he Benoni

Eun druez e voa o c'blevet  
Pa en em gavas dilezet  
Allas ! emezi, ma buguel  
Er vech ma e renquin mervel !

Guerc'hes Vari petra a rin ?  
Ne meus mui a lez em peultrin  
Ne den gantan nemed ar goad !  
Ne gav mui eur strill a lez mad

O va Doue oll buissant !  
Ho pet soign eus an innocent ?  
Roit dezi ar man da sebri,  
Vel ma roit d'ar malvriini.

Neuze e tisquen ar Verc'hez  
Er c'hoad, da gavet ar Zantez,  
Da zigas desi eun heizez  
A voa d'ho buguel maguerez.

Quemeret e mabic c'christen,  
Ha dent da guichen ar feunteun;  
Cetu aze dec'h enn heizez  
A vse d'ho buguel maguerez.

Ar blezi, ar loeuén mechaut  
A voe dese obeissant :  
Bemdez e teuent d'he enori,  
Ha da renta bisit desi.

Er c'hoad e voa eur porc'hel gue  
A deue d'he goelet hemdez,  
Da durnial an douar dezi,  
Da gavet queler da zebi.

Pa voa an daou vloa tremenet  
Eun Ael a zo deut d'e guelet,  
Hac a ro dei eur groas arc'hant  
Hac eur crucifix olifant,

Courach, va merc'b na scuisit qet  
Eau dez arrio vit delivret :  
Preparet eo a gurunen  
A ielo eun devez var ho penn

Pa voa ar hemp bloa tremenet.  
Da wela eo en em laqet ;  
Var e daoulin dirac ar groas  
Evelen outi e gomzaz :

Pedos emezi ma Doue !  
Hac er c'his ma e chomin-me  
Hananeketawalac'h pemb blosas.  
Da veza bet ar poannio bras

M'am be tanet o ilisou,  
Ha renverset ho auteriou,  
Eni bije ho coler apeset  
Gant an dælo a meus scuillet.

Petra va Doue a meus gret  
Da veza quen abandonnet.  
Dija a meus encourajet  
An usach am boa da brezec.

Mæs mui tra a gresq va foan  
E'heo ma buguelic bian.  
Ar grucifi dre viraci bras,  
Evelen outi a gomzan :

Hame, va merc'h petra meusgret  
Da veza ous eur groas slaguet ?  
Guir eo ho mab a gresq ho poan  
Va bini n'en de quet bian

Guelet, ma Mam, Yan, Madalen.  
Rannet hor c'halon em c'hichen  
Cetus ar santez consolet  
Gant ar voez Zalver ar bed ;

Ne c'houlen mui nemet poaniou,  
Hac ar c'hrueilla tourmanchou.  
Pa voa eun deves an Autrou  
O sellet eus a baperou,

Ec'h erruas gant ar billet  
E devoa scrivet e bried.  
Na ouffe den consideri  
Er c'hlac'hac; e velanconi.

Tost e d'he galon ranna  
Pa lennas an tam paper-ma  
Siffroi na neus mui a repos,  
Na all coussuet na de na nos;

Gant eur voez en lavaras deza,  
Te zo eun den a c'hrueilla ;  
Te teus lazet da vab ena  
Ha Drogan, ha Genovefa

En em lakat a ra express  
Da vont d'ar chasse eun deves  
Na ma recontras eun heizez  
En rentas en coad ar gontez

Er c'havern eo en em dec'hed,  
A dreiz quein a Zantez euset ;  
Sifroi a voa estonnet bras  
Form eun feumeulen pa velas,

Pa velas form enr feumeulen ;  
Hac eun heizez en e c'hichen,  
Eur voez a lavaras dezan :  
Sifroi, Genovefa homman,

Perac oc'h aze er guis-ze  
Er form-ze gand a leonet gouë ?  
Me zo eur vreg eus a Vrabant,  
A zo seil vloas zo en tourmant.

A zo sez vloas on retiret  
Gant aoun rac coler va fried  
Greg a Vrabant d'in lavaret,  
O c'hanoc'h-hu pe ano a ret ?

Genovefa a voant hanvet,  
Eur palatin voa ma fried,  
Kri vije 'r c'halon na velje,  
Tost da c'havern neb a wije.

Guelet ar Princ hac ar Brincees  
A semplet o daou assembles,  
Ha pa voant o daou dissemplet,  
Ar Princ goulen eus e bried ;

Pelec'h eman ar c'brouardur  
En deus eun tad quen dinatur ?  
Sifroi beo dre c'has Doue,  
Cetu e vaguerez aze...

Incontinant pa zistroas,  
En e c'hlichen en eur c'havas,  
Hac eur dornad queler ganta  
Da rei d'he vaïmm evit leina.

Ordern a ra da vevellou  
Mont da guer da vit habijou,  
Hac eur c'baros equipet-mad,  
Evit donet prest d'ho c'herc'hat.

Bevet ho deveus assembles  
Eur bloas gant cals a zantelez,  
Genovefa a zecedas,  
Ar Princ hag e vad a chomas.

Ma ejont o daou assembles  
Da dremen o rest ho buez  
Da plas ma voa Genovefa  
Dober pinijen a vrassa.

Genovefa, ni ho suppli  
Da gavet sonj ac'hanomp-ni  
Troït divarnomb an teir goalen,  
Brezel, quernez, hac ar vocen.

